



Gant ar bed oll voa enoret.

Beza voa' vrassa qalite,  
 Pa voa hi merc'h da eur Roue;  
 Rac merc'h voa d'ar Roue Anton,  
 E Contantinopl e voa e dron.

Pa voa Pab e Rom Sant Clement,  
 Ennes a voa eus e c'herent,  
 E voe bars er bed-mâ ganet  
 Er blaves pêvar c'chant ha déc.

Goude an Incarnation  
 A Jesus, hon Roue güirion,  
 Er guær eus a Gonsstantinopl,  
 Hac estimet bras gant ar bobl.

Pa voe en oad a bemzec vloas,  
 He mam diganti a varvas,  
 Ma fallas d'e zad e c'havet  
 Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,  
 Hac en esper cavet e c'hrat,  
 Evit caout e gonsantamant  
 Da zemezi d'e verc'h yaouanq.

Ar Pab neuze pa er c'hlêvas,  
 A respont gant un horror bras:

Pelêc'h ma'r o'christen var ar bed  
 A guemerfe' verc'h da bried?

Gant an Ilis eo difennet,  
 Ha gant Doue eo ordrenet  
 Na vezo james eureujet  
 Un tad d'e verc'h james neptet.

E ve demeet ur verc'h d'e zad,  
 Ennes so ur c'hrim execrapl;  
 Ur c'hrim a enep al lezen,  
 Sivoas, etouez ar gristenien.

P'e devoe clêvet Helena  
 Ec'h arruje sur qement-mâ,  
 Var ar môr en em ambarqas,  
 Hac er Flandres en em rentas.

Eno pa voë hi arruet,  
 En un eclus en em rentet,  
 Pa voë tôt da un abati,  
 E commanças son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet  
 A voë qerqent bras estonet  
 O clêvet ar c'hleyer o son,  
 Hac int mont oll en prêson.

Hac int mont ha sellet neuze

Piou a voa èru er c'houstre,  
 Ma remerqjont ur semelen  
 A zeue d'o c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont e procession,  
 Gant respect ha devotion,  
 Evit monet d'e rancontri,  
 Gant eur joa wras d'e saludi.

Ha pa velas hi aneze,  
 E voe estonet bras ive,  
 Hac ouz o guelet a vanden  
 O tout d'e rancontr evellen.

Neuze recevjont anezi,  
 Ha cuuduet d'an abati,  
 Rac guelet a rent oll certen  
 E care an Autrou souveren.

Mes na chommas qet pell gante,  
 E chenchas timat a gontre  
 Dirac ar Roue Catebron,  
 Un den cruel ha dirêzon.

Mont a eure var bord ar mor  
 Evit savetei e enot,  
 Hac e pedas merdai di,  
 Mar plich ganêc'h va ambarqi.

Un dra derrubl a erruas  
 Pa voant eat e creiz ar mōr glas,  
 Rac an oll dud a voe lazet  
 Gant ar c'horserrien arrajet.

Excepstet Santez Helena,  
 A voa'r femelen ar gaera;  
 O sonjal cavout e guerc'hdet,  
 E voe hi gante reservet.

En orêson en em jaqas,  
 Da Jesus n'em recommandas:  
 M'ho ped, va Jesus, va Roue,  
 Conservit va virginite.

Pa voe achuet e feden,  
 D'hor Zalver Jesus evellen,  
 Un tan eus an eë a goezas,  
 Al lestr bac an dud a losqas.

Hi voe preservet gouscoude  
 Gañt ur planqen, dre c'hraç Doue,  
 Ec'h arruas e rivier Sign,  
 E qichennic bord ur jardin.

Ar rivier' yê bete Londres,  
 Hac eno e voa ur verjes,  
 Hac ur feunteun gaer a gavas,

En e c'hichen e tisquizas.

Ar Roue Herri e guelas  
Bars en un dristidiguez bras,  
Azeet etal ar feunteun,  
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostât a ras neuze outi,  
Hac e c'houennas diganti:  
Livirit din presantamant  
A belec'h oc'h, merc'hic yaouanq.

Me zo eus a Constantinopl,  
A guerent pinvidic ha nobl,  
Hac a zo amâ achapet  
A dre daouarn ar barbaret.

Ah! va c'halon a fazi din,  
Rac naoun a meus, na ellân moi...  
Pell bras zo n'e meus débret tam,  
Ha va c'halon em c'breiz a rann.

Ar Roue Herri p'e c'hlêvas,  
D'e Aumonier a gommandas  
Monet pront da guerc'hat dezi  
Peadra vit e soulaji.

Neuze en e c'hassas gantâ  
Ebars en e dy da loja,

Hac o tont d'e recommandi  
Evel unan a dud an ty.

Goude se e voent demezet,  
Souden e voe grêt an eured,  
Hac ar fest a badas gante  
Betec an nombr a uguent de,

Daou vlavez anter e zint bet  
En o slijadar assuré,  
Qen en em gávas douguerez,  
Neuze e devoe goal-vuez.

Digant e mam-gaer, ar Zantez  
E devoe calz a baonrentez;  
Hervez ma rapport an histoar,  
E devoe calz eus a c'hlæ'här.

Ar Roue Herri a yas timat  
Da gaout an Tad Säntel ar Pab,  
Evel m'en d'oa recommandet  
D'ar gombat ouz ar Sarazinet.

Lezel a eure en secret  
Tri verq er guér eus se gachet:  
Rêi ras unan da Hélénaj  
Un all da Vari Clocestra.

An drede neuze a roas

D'ar C'homt a voa e vignon bras,  
 Da bini e recommandas  
 E bried gant affection vras.

Glac'har vras a voe er pales,  
 O lavaret adieu assambles,  
 Hac epad eiz vloas varnuguent  
 N'en eur velint sur e nep hent.

Helena e devoa ganet  
 Daou vuguel a voa caer meurbet;  
 He mām-gaer a roas da gredi  
 Penos e devoa bet daou guy.

Ar Roue Herri pa glēvas,  
 A voe certen estonet bras  
 O clēvet e devoa ganet  
 Daou guy evelse e bried.

Neuzé e voe hi condaonet  
 Da gaout e brec'h deo troc'het  
 Hac amaret e bugale  
 Unan desi a bep coste.

Ambarget voe var ar mōr bras,  
 Mars e Breiz e tisqennas.  
 Ap lestr en d'oa e digasset  
 Da Londres a zo retornet.

Cri vije'r galon na voelje,  
 Och e guélet nep a vije,  
 O rîe da zena d'e bugale,  
 Hac hi prest da vervel digante.

Da gousqet pa en em laqas,  
 Daou leon eus ar c'hoat a zeuas,  
 Hac a gassas an daou vuguel;  
 Qement-mâ certen voa cruel!

Un Ermit a voa neuze'r c'hoat,  
 Ha diouz ar c'hri a zeuas timat;  
 Hac a gavas an daou vuguel  
 Etre griffou daou leon cruel.

Unan anê Brie a hanvas,  
 Eguile Martin a c'halvas;  
 O daou e voant gantân maguet  
 Epad c'hoezec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ  
 E voe e Naonet Helena,  
 Hac un hostizes a gavas,  
 Truez outi a guemeras.

Chom a eure da zervicha  
 Ebars an ty voa'n distera;  
 Disprizet voa gant pepini,

Laqet voe da dorcha listri.

Ober a r   gant dilijan  ,  
Hep na rebel, na repugnanc,  
Qement a ordenet dezi,  
En o r   oll hep contraigui.

Guelit am   greg eur Roue  
Carguet demeus a baourente,  
Reatet qen humbl ha qen izel  
Dirac ar bed universel.

Sellit brem  n humilit  ,  
Hounnes a blich bras da Zoue,  
Rac an humbl a zo exaltet,  
Hac ar superb zo discaret.

Ar Roue Herri distro a R  m,  
Ha gaot  n ar Roue Anton,  
A erruas en e bales  
Ebars er gu  r eus a Londres.

Allas! eno p   erruas,  
Ar C'hont Clocester a gavas,  
Ha goulen neuze digant    
Pel  ch e voa   t Helena.

Nao messager voe digasset  
Dirac ar Roue da lavar  t.

O d'oa digasset peb a lizer  
 D'ar C'hont Clocester a dra sclêr..

Mes un all a zeuas goude,  
 A lavaras ar virione,  
 Pênos e voa bet trahisset  
 Gant ar Rouanes côs assuret.

Ar Rouanes côs zo condaonet  
 Da veza prest en beo losqet,  
 Abalamour ma e devoa  
 Laqet trec'hi brec'h Helena.

Me lavaro dêc'h ar récit  
 An daou vuguel hac an Hermit,  
 Ha penos yoe an disparti  
 Ebars er c'hoat gant calz a gri.

An Ermit var bord ar rivier  
 A yeas gant an daou vuguel :  
 Amân, emezân, ho qivis,  
 Ganén d'am zy ho tigassis.

An dàou vuguel a respondas  
 D'an Ermit oute pa gomzas :  
 N'en deo qet c'houi-ta, Ermit mad,  
 Eo a dra sur a zo hon tad ?

An Ermit neuze a lavaras

Deze gant tristidiguéz vrás :  
 Allas ! m'ho cavas amâ lezet  
 Etre ar bleizi ha loënet.

Ha gant truez m'o tigassas  
 Ho taou ganén d'am ermitach ,  
 Hac e meus iveau ho maguet ,  
 Hoch' elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavaré  
 An eil d'eguile aneze :  
 Pa n'en dê an Ermit hon tad ,  
 Deomp-ni bremâ da glasq hor mad.

An Ermit a voa trist meurbet ,  
 Pa o c'hlêvas o lavaret  
 E zajent , allas ! da glasq o mat ,  
 Pa ne voa qet én voa o zad.

Pa voant o tiscours evelse ,  
 Erruout merdaidi ene :  
 Bremâ , emaint , euz c'hoezec vloa  
 E leqejomp amâ Helena.

Gant anqen vrás digonsolet  
 D'e daou buguel e d'oa collet ,  
 N'e devoa brec'h nemet unan  
 Da zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin :

Brie , va breur , deomp betec arsin  
 Elec'h ma plijo Doue hor c'hass ;  
 Ma cavimp hor mam ur vech c'hoas.

Merdaidi , ni ho suppli ,  
 Plijet ganêc'h hon ambarqi ,  
 Ma zaimp en hano Doue  
 Da glasq hor bro hac hor c'hontre .

Ar merdaidi a respontas  
 D'an dsou vuguel pa o c'hlêvas :  
 Deut en hon lestr hac ambarget ,  
 Ni ho laqai en douar assuret .

En Allamagn ec'h arrujont ,  
 Hac arc'hant dezo a rojont ;  
 Ouspen e rojont da lejna  
 D'an daou vuguel gant calz a joa .

En Baviere pa voant erru ,  
 E yezont o daou a ru da ru ,  
 Ma o guelas ar Rouanes  
 Ebars er ru eus e fales .

Ma commandas d'e messager  
 Mont da guerc'hat an daou vuguel ,  
 Rac qer caer voant evel an de ,

Clorianda o admire.

Digasset voant neuze dirazi,  
 Roet voe deze da zebri :  
 Neuze evel tud affamet  
 Ne squizent o tebri o boued.

Re hir ven ma conten antier  
 Ar brezel voa er hro Bavièr ;  
 Mes bezal voant victorius  
 An daou vuguel, dre c'hraç Jesus.

Martin a voa un den vaillant,  
 Hac ebars er gombat sanglaet  
 Laza a ras calz a Sarasinet,  
 Ha cals eus an Turqianet.

An Itron Varia Boloigne  
 O sicouras sur en deiz-ze,  
 Hac evit caout ar victoar  
 Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Tour e teujont ac'hane,  
 Ur guær a so e Tourenne ;  
 Sant Martin a voa aumonier  
 Da rëi soulach d'ar heorien qer.

O mam iveau a erryas  
 En Tour gant ur baoufente vras,

Pa voa Martin o tistribui  
An aluzen da bep hini.

Goulen a eure diouti,  
Pa deuas da zellet outi,  
Pe a leac'h oc'h deut amâ?  
C'houi n'en doc'h qet eus ar vro-mâ.

Command a ras neuze e galon  
Da zonet d'e biqat qen don,  
Neuze e teuas sonch dezâ  
Ebars en e vam Helena

Diaguent en devoa clêvet,  
Evel ma hon eus rapportet,  
E voa troc'het ur vrec'h dezi,  
Hac én don da zonjal enni.

Neuze en em anavejont,  
Gant joa vras en em zaludjont :  
Autrou Jesus, eme Helena,  
Va bugale guès a velân.

Na zeziren qet qent mervel,  
Nemet guelet va daou vuguel :  
Autrou Jesus, Roue an Trôn,  
Homâ zo consolation  
Da eur vam e devoa collet,

He daou buguel e deus cavet.

Adieu emezi , va bugale ,  
 Mont a ràn bremàn en han' Doue ,  
 Ho pet ac'hanon sonch ha memoar  
 Va bugale guer var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ive  
 Pa vin e rouantelez an èe ,  
 Evit ma vezimp oll assambles  
 Er barados gant an æles.

**F I N.**

---

E Montroulez , e ty LÉDAN , e traon ru ar Vor.